



Master M.E.F. - Kelenn divyezhek dre soubidigezh

Kelenner-skol

Diwan

Ur stummadur efedus

Postoù-labour da bourveziñ

Ur vicher troet ouzh an dazont

Kaozeal a rit brezhoneg
Plijout a ra deoc'h labourat gant ar vugale,
labourat a skipailh, kemer intrudu
C'hoant ho peus da gas ar yezh war-raok

- Un diplom live **BAC + 3** a zo ganeoc'h
(aotreegezh pe diplom kevatal war ne vern peseurt danvez).
- **Brezhoneg** a gomzit hag a skrivit mat a-walc'h evit heuliañ
ur stummadur e brezhoneg

**Dibabit bezañ kelenner-skol
er rouedad skolioù divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg
DIWAN**

**DEUIT E DAREMPRED GANEOMP
DIWAN, BP 147, 29411 LANDERNE Cedex
diwan.rannarchelenn@wanadoo.fr
 02.98.21.34.95**

Gant hor c'hresk ingal e kinnigomp trawalc'h a bostoù labour
evit ar 15 danvez-skolaer bennak a heulio ar stummadur
e 2013-2014. **Kontradoù-labour didermen** a vo kinniget deoc'h
hag anvet e voc'h en ur skol Diwan evel skolaer pe kelenner-skol:

▪ **skolaer, ur c'hontrad-labour CDI ganeoc'h,**

war ar postoù nann kevratet gant an Deskadurezh Stad
gant ma vo bet validet :

- ar bloavezh 1añ stummadur (master 1) e KELENN
(dic'hopr, met kemeret koust ar stummadur e karg gant
DIWAN, ha posupl goulenn ar yalc'had SKOAZELL gant Rannvro
Breizh);
- an eil bloavezh evel skolaer-stajiad e karg eus ur c'hlas en
ur skol DIWAN (CDD 1 bloavezh-skol, gopret).
'C'heller echuiñ e vaster (stummadur a vareadoù e KELENN)
ha tremen ar genstrivadeg CRPE e-kerzh ar bloavezh-se pe
diwezhatoc'h.

▪ **kelenner-skol titlet gant an Deskadurezh-Stad**

war ur post e DIWAN gant ma vo bet paket :

- ar master (Master 2 kadarnaet),
- hag ar genstrivadeg kelennerien-skol (postoù DIWAN).

E KEMPER e vo prientet ar Master gant KELENN, kreizenn stummañ Diwan

eus miz Gwengolo 2013 da viz Even 2014,
e kenlabour gant skol-veur Perpignan
ha gant an ISLRF, Ensavadur Uhel Yezhoù ar Republik Gall

*Master Kelenn ha Stummañ (MEF) -
kelenn divyezhek dre soubidigezh - brezhoneg-galleg.*

4 zachenn vras er stummadur :

1. Donaat ar barrezhioù e brezhoneg,
2. Stummadur kentañ war ar vicher kelenner-skol divyezhek dre soubidigezh, prantadoù teorikel hag 8 sizhunvezh staj er skolioù DIWAN,
3. Klaskerezh : memor (diazezoù e master 1, donaat ha sevel ar skrid e master 2),
4. Prientiñ ar genstrivadeg diavaez divyezhek kelennerien-skol (postoù DIWAN).



Dorioù-digor KELENN

a vo dalc'het
d'ar sadorn 23 a viz Meurzh 2013
etre 2e ha 5e gm.

BAC + 3
Barregezhioù e brezhoneg
(stummadur brezhoneg Kelenn, Aotreegezh vrezhoneg, stummadurioù hir Stumdi, S.A.E. ...)

**Bodad degemer er stummadur
aozet gant Diwan**

Kreizenn stummañ KELENN

Prientiñ ar Master micherel MEF Kelenn ha Stummañ Kelenn divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg validet gant Skol-Veur Perpinyà-Perpignan.

Validañ an eil bloavezh
ha pakañ ar Master

Validañ
ar bloavezh kentañ

Kenstrivadeg kelennerien skol
kontradet gant
an Deskadurezh Stad

1 bloavezh-stag e karg
Titladur DIWAN ha C.D.I

1 bloavezh-staj en ur skol
Validet gant an D.S.
ha gant DIWAN

Stummadur
e brezhoneg

Post Kelenner skol

Anvidigezh en ur skol DIWAN
war ur post kontradet

Post skolaer

Anvidigezh en ur skol DIWAN
war ur post nann-kontradet